

# FRAJILITE AN DUD YAOUANC

## Var eun ton rigolo

Ni boa eur hoguic yaouanc oa duman guenemp-ni  
 Oa cōmāset da gana, mes breman na ra mui  
 Eun nosvez goude e goan, o tont eur zonj ne ben  
 Me a renk mont en nos man, var digare pourmen.

Me renk ober eur pale, eun droyad var ar mez  
 Da glask e merh Perina, digant a intavez  
 Pe guir on hanvet coguik, gant oll dud ar vroma  
 Me garfe caout eur bolez, vit nem zivertissa.

Pa meus tapet an hano, a goguik vit partaj  
 Vo ret din caouet parrez, da gomans ma menaj  
 Perin merh an intavez, hounez a zo dam grad  
 Kannerez a denserez, brillant e daou lagad.

Bonsoir dehu intavez, setu me deut exprez  
 Da glask o merck Perina, da hanter tieguez  
 Rac keit a ma vemp yaouanc, or bo contantamant  
 A plujadur a sambles, ep chagrin na tourmant

Ma merck me zo abredic eur blavez hoaz  
 Mar de contant ar buguel, me na renket a gaz  
 Kousket eo eue guele, er pen dan traou a ti  
 Monet a ran de havet, da houien diganti.

Arsa ma merh emezi, na din-me levered  
 A houi zo contant paouric, da gave'l eur bried  
 Berroh kafet an amzer breman epad an anv  
 A toma doh o kuele, goude pa zeui ar goanv.

O ya va mam emezi, certain me zo contant  
 Demeus a greis ma halon, da gaout eur pot yaouane  
 Mar dai caner a dansser, ac eur pot delicat  
 Neuze a meus esperans, d'ober tieguez mad.

Neuze ar pot yaouanc man, a zo joaus a ye  
 Ac a zistroas dar gaer, hed an hent near gane  
 Penos eta yan goguic, le zo bet o vale  
 Eun tam mout divezit, o hanons domp an de.

Neuze zistroas ouzin, gant eun air da hoarzin  
 Mar de goir on me koguic, houi zo eur louarn lin  
 Houi pefe ar vadelez, da vont breman raetal  
 Da anons ma dimezi, betec ar presbital

Ar hoars var ma muzellou, pa non ket vit miret  
 Ya va mignon emezan, me rei ze na reket  
 Monet a ran evidoh, betec ar presbital  
 Rac merh an intavez, evidoh ne ket fal.

Bonjour da autrou person, me a zo deut gant prez  
 Da hout a houi zimefe, eur hok ac eur bolez  
 Pere o deus dezir braz, da vea unisset  
 Eun tamic a zo dejà, o deus enim choaset.

Neuze a respontas din ive neur vous hoarzin  
 Deus aman ebars er zal, kemer eur bane guin  
 Troët ezout bepred, eun tamic de kevyer  
 A te heus klevet jamais, ve dimezet ar yer.

Eskusit nautrou person, mar meus drouc parlantet  
 Malheur eo dandud yaouanc, pere zo leshanvet  
 A re a barlantan doh, a zo daou zen yaouane  
 A zezir be unisset, velt diou galon gontant.

A re a barlantan deoh, zo mal a fumelen  
 A zezir bea staguet, gant ar memez chaden  
 Unan ane triveh vla, an hani all pemzec  
 Zo pel zo braz en hirvout, hortoz be dimezet.

Ma et dar guer ma mignon, lar de dont an illis  
 A me o interrojo, var dern a hatekis  
 Pa oa goulet digante, o na ouient netra  
 Demeus ar sacramanchou, a re brinsipalla

Filet dar guer bugale, evit eur b'oa pe daou  
 Da hortoz ma po desket, dern ar sacramanchou  
 Neuze zavas e zion skoa, me a gred a zonje  
 Eun druez eo emezan, dimezi buzale.

Neuze a zont d'ar guer, o daou eneur ouela  
 Ret a vo demp emezo, donet da studia  
 Ret a vo demp studia, couls an de ac en noz  
 Mar oneomp ket re neve, ni zesko a re goz.

Tri pe bevar mis goude, a ya an intavez  
 Da gaout an autrou person, da lar dan tol evez  
 Rac va merch zo languissant, eun tami zo déjà  
 Seul vui avans e hlenvet, ya bepred var vella.

Setu an autrou person, dezi neus lavaret  
 Lavarit dezo dont hoas, ac a vont dimezet  
 Aoui a fad daou zen yaouanc, a lavar ar person  
 A oar nem gconvertissa, ep mont dar mission.

Ar memez ira ezint bet, dimed ac eureujet.  
 Gras da vēa eūrūz, keit a vont var ar bed  
 Bonheur zeziromp de keit a vont er bed ma  
 A goude pa vont maro, er gloar da jouissa

FIN

CORENTIN BOUARD.

Tous droits réservés :

GUILLERMIC, Yves.